



GUERZ

VAR SUJET UR FEMELEN MANET INTANVEZ

GANT PÉVAR BUGUEL.

Var ton : *Cantic ar Burete.*

Ni o supli tud devot
Dont da cilaou a galon
Ur c'hantic truezus
A doucho ho calon ;
A zo grêt d'eun intanvez
Demeus a Breiz-Izel
O qimiadi oc'h e mab
Partiat d'ar brezel.

Qement a glêo ar vers-mâ
Hac a rêi reflexion,
A zo crior evit an tigr
Hac evit ul leon
Ma ne al dont da ouela
Pa entento e lenn,
Oll dont da sonjal
Ne dêo qet guir gristen.

DRindet santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin,
Me ho ped da rêi sicour d'o servicher indign :
Va speret a zo frajil, ha va studi izel ;
Sclêrijen a c'houlennàn ouzoc'h, Drindet Santel.

Goerc'hez glorijs Vari, d'êc'h en em adressàn ;
Obtenit din ar memoar evit ellout rimàn.

Pa gomprenàn ar sujet, a ra din scuil daelou ;
Me gred e vezo mantret oll qement e c'hlêvo.

Cruelloc'h e zomp êru eguet an tirantet
Pere laqas d'ar maro hor Zalver beniguet ;
Ne zeus tam humanite etouez ar gristenien ;
E zit da velet ractal eus a ze ar breuven.

Me gomz ouz ur femelen eus a Escopti Dol,
A voa manet intanvez, e hano Anna Bol :
Pêvar eus a vugale a chom gant ar vreg-se ;
N'oa get c'hoas achu'r pemp blas ar c'hossa eus anê.

E daou yaouanqa a voa no güele languissant ;
Sònjomp ebars er vizer hac ebars an tourmant
E deveus bet ar vreg-màn gant e bugaligou,
Hep cavet nep tam sicour digant den eus ar vrô.

Qement tam meubl e devoa a voerzas prontamant,
Evit ellout rêi souten d'e fêvar innoçant ;
E zamouigou dillat prest goude a voerzas :
Truezus voa e güelet cazi ebars en noas.

Bremàn var un tamic plous en eur c'horn eus an ti,
E renq monet da repos, e bugale hac hi.
E daou buguel languissant a zo êt gant Doue,
Hac hi chom paralitic qerqent var e güele.

E mab hena a lavar : me ya da zervichi,
Ha qement a c'honeîn vo vit ho zoulaji ;
Lavarat a ra d'evreur : bez soign diouz hor mam guèz ;
Hit da glasq dêi tamou bouet, ha n'ho pet get a vez.

E mab hena neus cavet ur gondition vad ;
Mes qement a c'honêe a laqe en dillat :
D'ar gloar ha d'ar vanite e zê en em livret,
Ne zônje get en e vam var e güele chommet.

E mabig anter-hena a voa ganti chommet,
Hac a yê bemde endro da glasq dêi tamou bouet ;
Soigni rê e vam bemde, ha goalc'hi e dillat :
Ema eo güir melezour ar vugaligou vad.

E mab hena voa en oad da denna d'ar billet ;
 Mes dre m'oa mab intanvez e zeo bet exantet ;
 E vreur, ar blavez goude, en deveus bet tennet,
 D'accomplissa ar glac'har an numero isel en deus bet.

Bremâ e retoru d'ar guêr hac e galon mantret.
 P'êru e qichen e vam calz daelou n'eus scuillet :
 Va mamic paour, emean, petra refot bremâ ?
 Me meus numero isel, hac a renq partia !

E vamic paour en consol gant comzou douç meurbet.
 Va buguel qèz, emezi, n'em gonformi zo ret ;
 Bezit propr ha den honest, grit ervat ho tever,
 Ha me a bedo Doue d'am c'honsoli er guêr.

Lavarat a ra d'e vam da gaout va breur me ya,
 Vit e bedi ur veach qent eguet partia ;
 Da rêi dèc'h un dra benac ur vechic an amzer,
 D'ho soulaji, va mam baour, ebars en ho mizer.

P'êru e qichen e vreur, e lavaras deàn :
 Me meus bet ar billet du, hac a renc partiàn ;
 Ho pedi ràn, va breur qès, da rêi un dra benac
 Da zoulaji hor mam baour a zo qer mizerabl !

E vreur a respont deàn : ne zeu qet var va zro
 D'interrompi ac'hanòn gant da finesseou ;
 Qentoc'h eguet da gredi, me c'houl bea ractal
 Rentet amâ var ar plaç bouzar ha mud ha dall.

Accordet e voe deàn pez en d'oa goulennet,
 Rentet ha dall ha bouzar, ar gomz en deus collet ;
 Rentet e zeo maleürus bete fin e zeyou :
 Demeus ur seurt accidant Doue d'hon preservo.

E vreur evel m'er güelas bars er stad-se rentet,
 A zo retornet d'ar guêr hac e galon mantret ;
 Lavarat a ra d'e vam, en eur scuilla daelou :
 Va breur eo'r maleürussa a guement zo er vro.

D'al ma meus laret deàn rêi un dra benaqet,
 Da zoulaji va mam baour, en coler e zeo êt ;
 Goulennet en deus bea bouzar ha dall ha mud ;
 Bet en deveus e c'houlen ractal dirac an dud.

E vam a lavar deàn : na veles qen ! me bed
 Doue a vizericord da rêi did ar guelet.
 Gouzout a rit, va buguel, Doue zo un Tad mad ;
 Hac a bardon ar pec'her demeus a galon vad.

Pa voa ar vam desolet d'e buguel o prezeg.
 Eur jandarm ebars en ti a zo bet antreet,
 Da rêi deàn e vultin da bartial ractal,
 Emâ zo bet dê o daou an divea glac'har.

Ar vam baour oll desolet a lavar d'e buguel :
 Deus c'hoas etre va divrec'h ur vech qent vit mervel.
 En em boqat a rejont an eil hac eguile ;
 Ranna rêje ar galon a glêjve aneze.

Ar buguel-màn desolet a lavar d'e vam guéz :
 Bet òn e clasq dêc'h sicour ebars en amezeguez ;
 A boan eus va zelaouet ha prizet va c'hlêvet ;
 Evelse, va mamic qèz, c'houi vo abandonet !

E vam a lavar deàn : partiit, va buguel,
 Ha va list en gloar Doue.... ret e vezo mervel ;
 Serrit an nôr var va c'hein ha cassit an alc'hoë,
 En eur c'horn eus an ilis em c'hefot goude ze.

Qestion e voe bremâ dê d'en em separi,
 Pitoyabl e voa clêvet ar c'hri a voa en ti.
 Adieu dêc'h, va mamic paour, a lar ar buguel qèz,
 Ranna a ra e galon pa voa e vont ermèz.

Alc'hoëet en deus an nôr var e vam languissant,
 Mont a ra gant e alc'hoë d'an ilis prontamant :
 Laqat eure aneàn var gornic an auter :
 Aze, meàn, m'en cavo, ma tistroàn d'ar guer.

Stoui ra var e zaoulin en ilis beniguet ;
 Goulen a ra ur mennat digant Salver ar bed :
 Accordit dîn, va Doue, ma teuîn da velet
 Enterri va mamic paour, pa vezo decedet.

Cetu-én-ta partiet da vonet d'an arme ;
 E vamic paour a varvas pemzec devez goude ;
 Ar c'hleyer eus ar Barros a zon dezi glazou,
 Hac a guntinu nôs-de hep caout den var o zro.

Accordet e voe deàn pez en d'oa goulennet.
 Anter cant leo demeus ar guer ar c'hleyer neus clêvet;
 Larat ra d'e gabiten : va mamie baour zo maro ,
 Me glêo patant ar c'hleyer o son dezi glazou.

E gabiten a lavar : eur miracl bras e ve
 Clêvet cleyer ho parros anter-cant lêo anê.
 Larat ra d'e gabiten qemeret un tam fe,
 Ha ch'oui glêvo aneze amàn qercoulz ha me.

E gabiten a lavar : me o c'hlêo coulz ha te;
 Me royo dit, va buguel, bremâzon da gônje
 Ma zi d'ar guêr da velet enterri da vam guèz,
 Rac gout a ràn da galon zo en tristidiguez.

P'en devoe bet e gonje e vale nôs ha de,
 Eruout a ra er guêr hep na voe pell dale;
 Monet a ra d'an ilis, ma stou var e zaoulin
 Da drugarecat Doue eus e c'hraçou divin.

Pa voe êchu e beden e qemer an alc'hoë;
 A dal ma tigor an nôr e sell ouz ar güele,
 Ma cav e vam baour maro, varni en em dolas,
 Gant ar glac'har en devoa e galon a rannas.

An nôr voa manet digor, tud a zo antreet,
 Ma cavjont anê o daou var ar plous decedet;
 Monet a rejont ractal da gavet ar Person
 Evit anonci deàn an desolation.

Ar Person ro lincelliou evit o liena,
 Hac e ped ive an dud da zont d'o assista.
 Enterret e voent neuze gant peb solennite,
 Laget o daou assambles ebars er memes be.

Güelet oc'h eus, va breudeur, portret ur buguel mad,
 Accordet e voe deàn gant Doue e vennad.
 Heuillet en deveus bepret Gourc'hemennou Doue :
 Qemerit-én evit squer, me ho ped, bugale.

Composet gant Rene ar Bars, a Landreguer.





GUERZ

*Composet a neve var sujet un evenamant êruet gant eur
C'hure Santel a Escopti Milan.*

Var ton Santez Anna Palud.

ME ho ped, asistantet a bep seurt qalite,
Deut da glêvet eur recit composet a neve,
Divar eur c'hopi gallec ebars en brezonec.
Rac util eo disclêria ar pez zo êruet.

En Escopti eus Milan, en parros Belzoanne,
A zo eur C'hure santel, leun a humilite,
Truezus ha charitabl en andret ar beorien,
Hac a ro e oll danve evit dont d'o zouten.

El lec'h ma pos an arc'hant en devoa goneet,
Evit lemel eus anê na ziminuont qet,
Ar pez er gra chagrinet hac en nôs hac en de,
Pa na elle gout penos ec'h erru qementse.

Er bla tri ha daou-uguent, an eiz a vis c'hoevrer,
E ra an Ofiç divin dirac hor Mam santel
Ar Verc'hez glorius Vari, hor güir Advocades,
Souten an oll bec'herien en pep rouantelez.

Goude ar venediction demeus ar Sacramant
E zeus erruet un den en eur memes instant
D'e c'houlén da vont gantàn da velet un den clàn
A gave a voa erru en e heur divean.

Partiet int assambles gant an Autrou-Doue,
Hac an traou evit noui ar paour afflijet-se ;
Dre voner e recevas e oll Sacramantchou,
Hac eun anter-heur goude e souffre ar maro.

Charmet an Autrou Cure o velet ar boneur,
E chonimas d'e assista qen a deu da vervel,
Da bedi Doue evitàn gant eur galon barfet
Ha bete fin e vue en deus en asistet.

Pa voe maro an den-mâ e qemer e guimiad,
 En eur dont da zouheti deze oll nosvez vad
 Da veillad ar c'horf maro pehini voa gante,
 Hac e commanças e hent en eur bedi Doue.

An domestic eus an ty a voa bet evitàn,
 P'er güelas o partial, en em offras dezàn
 Da vonet d'e gundui betec e bresbital,
 Hac en trugaregeas gant eur galon leal.

Nan, eme'n Autrou Cure, ne meus aon rac netra,
 Pa ê güir em eus douguet Redemptor ar bed-mâ,
 E teuyo d'am preservi deus an drouc sperejou ;
 Rac credi a ràn e zeo mestr d'an oll buissançou.

Êt eur pennad ac'hane, îroet en eur c'harden,
 E clévas aroc deàn eur vouez terrupl o clêm,
 Hac o tonet d'e entent ec'h arrêt en e za
 Da sellet endro dezàn, mes na vele netra.

Poursu a ra e basiou evit tostât ountâ,
 Hac e remercas un den eus an anciena,
 Güen e vlêo hac e varo, qen a steredenne
 E zaoulagad varnezàn abaoue ma tostae.

En eur dont d'e vriata e c'houlennas outàn
 Gant calz a humilite : petra glasqit amàn ?
 Nav heur anter eo bremâ, êt an dud da gousqet,
 Hac an amzer, va mignon, a zo cri ha calet.

Bet òn o c'houlen loja en eun nebet plaçou,
 Hep ma zon anaveet gant hini ar mestrou,
 Hac en defot a repu e renqàn chom amâ,
 Qen a deui ar sclêrijen varnòn da bartia.

Deut ganén, mar plich ganêc'h, ême'n Autrou Cure,
 Ha m'ho laco da repos ebars en eur güele,
 Ha deus va c'homodie a rêi dêc'h da goannia
 Assambles ganén ouz tol, hac eus a bep güella.

Pa antreas en e di e yas da c'hoeza'n tân,
 Da domma'n den ancien, d'a c'hortos oza coan,
 Hac e lavar d'e vatez : prepar demp coan abret,
 Ma cozefomp assambles evel camaradet.

Pa voant ouz tol azeet e c'houlennas outàn
 A betare brô e voa ha piou rêl aneàn,
 Hac e respontas deàn e voa diouz Betleem,
 Emmanuel e hano, hep ma ellas compren.

C'hoas e c'houlennas outàn hac én a voa qernez
 Er vroyo a dremene dre ar rouantelez ;
 Hac e respontas dezàn partout voa'r memes tra,
 Ne velàn nemet crimou an abominapla.

An tadou hac ar vamou a velàn mepriset
 Dre oll gant ho bugale goude ma vent savet,
 Hac e tennont varneze ar venjanç eus an êe.
 Goall gollou ha drouc amzer hac ar mortalite.

Un nombr bras a vlavejou a vo en abondanç,
 Hac amzer vad da zestum ; dre oll ar Brovidanç.
 A ro an Autrou-Doue da veva ar bec'herien,
 D'ar re vo fidel deàn ne vanco birvigen.

Ractal e tisparissas diouz an Autrou Cure,
 Hac e chommas estonet o velet qementse ;
 Hac evit e recompanç eus e chariteou,
 E lar deàn qen a vo en joayou an ênvou.

Neuze e teu da gompren e voa hor Mestr divin
 En deus parlantet outàn, hac e ya d'an daoulin
 Da c'houlen pardon outàn eus a greiz e galon,
 Da c'hortoz mont da velet hor Zalver var e dron.

An hini neus recitet ebars en brezonec
 Tout an explication a zo grêt en gallec,
 A zo a baros Plouguiel, Yan ar Guen e hano,
 Hac e bried ouz en ren eiz blas ha trêgont zo.

FIN.



E Montroulez, eus a Imprimeri A. LÉDAN.